

BUEZ AN AUTROU
St. GUILLERM,
PATRON AR GUIR
BENITANTE T.

*Tennet eus ar Martyroloch Ro-
men, eus a scridou ANDRÉ
DUVAL, Corneille, hac an
Escop Tubaldus.*

Lequeat e Carmou Brezonec gant
N. ha D. Messire GUILLERM DU
BOISHARDY, Bælec.



E CASTEL-PAOL,
Intanvez J. P. CRÉMEUR, Librer.





BUEZ AN AUTROU
S.^T *GUILLERM,*

Duc a Guyenne, Count a Poitiers
ha Patron ar Benitantet.

Var ton Guers ar Guernez.

VA ficourit, o Speret Glan;
Da zifcleria da bep-unan,
Ar Vuez ha Conversion
Eus a Sant Guillerm va Phaeron;
Pa zeuer da gonsideri
Ar gommançamant anezi,
N'en deus den na ve estonet,
O songeal penaos oue senchet.

An dra-ma oue ur miracl bras
 Da un den na re quen agas ,
 Eveus a Bap nac a Roue ,
 Oue gret servicher da Zoue.

Ma oa da un Duc eus a Franç ,
 En devoa meurbet a chevanç ,
 Quement aon en doa rac e goll ,
 Ma el lese ato en e roll.

Yaouanc oa pa varvas e Dat ,
 Ha neuse en em roas timat
 D'ar cherioumat, d'an debauchou
 D'ar bordel ha d'an tavagnou.

Quer cruel oa ha quen estranch,
 Ne zeue den en e bresanç ,
 A dal ma vise en e goler ,
 Na ranne o phen dre an anter.

Quer bras oa evel ur Geant ,
 Ha cruel evel un Tyrant ,
 Traitour memes d'e vignonet ,
 Den en e c'her ne fizie quet.

Sant Guillerm

5

E creis ur solemnite vras
Priet e vreur a ravissas ,
Tri bloas e jouissas anezi ,
Goude he zaolas ermeas e dy.

A houarn ato oa armet ,
Na Roue, na Prinç na zouge quiet;
Laquat an dut d'en em laza ,
A oa tremen amfer deza.

Dre arrach ha dre malis
E persecutas an Ilis.
Ma ranquas ar Pap dont e Franc ,
Evit tec'het rac e buissanç.

Elec'h Innoçant , Anaclet
A laqueas , eb mar ebet ,
Da Bap dre e autorite ,
Dre e c'hallout ha cruaute.

Discleriet oue da Heretic ,
Discleriet oue da Schismatic ,
Gant ar Pap oue excumuniguet ,
Ermeas an Ilis e oue taolet.

6 *Buez an Autrou*

En ur goler e c'hantreas ,
Hac an Eiscop a chasteas ,
Ha gonfiscas e oll vadou
Da lacat en e denforiou.

Da gl'asq e lacat en hent mat ,
Sant Bernard a guerfas t'imat ,
D'e gaout , d'e gonvertissa ,
Mæs e laza a fallas deza.

Anfin gant Doue inspiret ,
Ar Sant a yas da guemeret
Ar Sacramant eus an Auter ,
Ha d'e zouguen dre zrouc amfer.

Ar Sant , gant ar Sacramant ,
A zeuas da racontr an Tyrant ,
Hac a gomfas en ur fæçon ,
Ne oue quet nebeut e eston.

Ar c'homfou-man a lavaras ,
Te so goas evit ur Judas ;
Persecuteur out dan Ilis ,
Diabolic e da valis.

Sant Guillem.

7

Ar Pap en deus la supphet,
Ha ny oll on eus daedet,
Ha n'on eus obteneuetra;
Evit Jesus gra ta u dra.

Etre va douarn e talc'han,
An hini a varno ar ped-man,
An hini a fo da Zote,
Da Dad, da Salve, da Roue.

An hini en deus da brenet,
Gantar Goad en deveus scuillet,
Ha da gondaono evit mat,
A fo dirac da zaoulagat.

Avis ha te er refuso,
Rac evidout e zeo maro?
Deus prest eta a vir galon,
Deus da c'houlen ounta pardon.

Neuse-fouden dre miracl bras,
Voa e faç d'an douar e couefas,
Ha quen terrubl oue e estlam
Ma couese ato a nevez flam.

Anfin pardon a c'houlennas ,
 Hac hor Saver er pardonas ,
 Var e zaodin en em laquas ,
 Heman so ur chenchamant bras.

Quent oa ul leon arraget,
 Ha breman zeo douç meurbet ;
 Dirac Doue e zeo un Oan ,
 Hac exempl mat da peb-unan.

Va Doue, mezan, ho pet truez
 Me ho ped dre ho madelez ,
 O pet truez euc'h ur paour quæs ,
 En deuz oc' offancet alies.

Na antreit quiet e Jugeamant ,
 Pe collet oun assuramant :
 N'en deus den quer santel er bed ,
 Mar quirit na vezo daonet.

Resolvet oun bete ar maro
 Da ober binigen garo ,
 Eveus va buez debordet ,
 Ha va fec'hejou commetet.

Sant Guillerm

9

Mont a ras da gaout un Hermit,
Un den fantel hac a verit,
En disposas d'an absolven,
Hac a roas dezan pinigen.

An Hermit dezan a lavaras,
Gretoc'heustri feurt pec'het bras,
Teir feurt pinigen a so ret,
Mar fell deoc'h beza pardonet.

Madou an Ilis oc'heus laeret,
Ho c'hoar gaer oc'heus violet,
Ha laza heb truez ebet;
Ande ar re-man tri fec'het.

Evit ar pezh oc'heus laeret,
Oc'h oll madou prest a rofet
D'ar paour, hac a bedo Jesus,
Ma vezo ouzoc'h truezus.

Evit ho c'hoar so violet,
Ur rochet rust prest a zougfet,
Breman hac oll hed ho puez
Ha yun bemdez a reot ivez.

Evit ar muntrou oc'heus gret,
 Un dillat houarn a guisqfet,
 Var ho croc'hen noas a zougfet.
 Ha bete ar maro a zalc'hfet.

Ouspén e zoc'h scumunuguet,
 Rac-se prest da Rom e zeet,
 Da c'houlén pardon ous ar Pap,
 Recevet viot evel e Vap.

E Rom evel ma c'hantreas,
 Da dreit ar Pab en em daolas,
 Aben teir guéc'h oa refuset
 Hac ar Pab n'er pardonne quet.

Er fin ar Pab gant truez bras
 Da Jerusalem er c'hallas,
 Hac eno e oue absolvét
 Eus e oll c'asiou reservet.

En un toul moguer oue nao bloas
 Oc'h ober ur binigen vras,
 Var ur men calet e coufque,
 Dour ha bara a guemere.

Clasquet oue gant an dut eus e dy
O clasq songeal e zistrei ,
Pa ne allent e resolvi ,
O deus songet e anlevi.

En dre o fæçon e quittas ,
Ha dan desert prest e tec'has ,
Hac eno heb beza troublet ,
E reas pinigen galet.

Ar plaç-se quent a oa carguet
A louenet gouez ha serpantet ;
Mæs abaoue ma c'hantreas ,
Nicun anezo ne flachas.

Sur un horrol bras oa clevet
An trous a rea an drouc-speret ,
Lies bemdeis oc'h e sponta ,
O clasq dont a benn aneza.

Avisiou evel ur plac'h coant ,
Avisiou evel ur serpant ,
Hac evel ul leon e furi ,
E rea seblant d'e zeyori.

Cannet oue gantan quer cruel,
 Ma oue darbet dezan mervel,
 Ar verc'hes en ur douch ountan
 A eure fallo anezan.

Quen admirabl oa he vuez
 Ma teue ar bopl hac an Ælez,
 D'e servicha ha d'e velet,
 D'e bidi ha d'e zarempret.

Ar Rouanez hac ar Princet,
 A zigace heb mar ebet,
 D'e gaout da bidi Jesus
 Ma vife outo truezus.

Sant Guillerm dre e exempl mat
 A obligeas cals da guitat,
 Da guitat bombançou ar bed,
 Ha d'en em renta Hermitet.

Sant Guillerm gant e bedennou
 A rea cals a Viraclou;
 E zourn a oa ur guir remed
 Da vellaat da bep feurt clenvet

E Chantillon un hostifes
A zeuas da goll he buez ,
Sant Guillerm he reffuscitas ;
Ande eman ur miracl bras ;
Lambr ar Sacramant an Ilis.
Satan e zorras dre valiç ;
An ol eol d'an douar a scuillas ,
An tan dre arraich a lazas.

Ar Sant en eur bidi Doue ,
A zeuas da laquat adarre ,
Ar lambr en ur pez , hac an tan
A allumas anezan e hunan.

Hac ouспен Prophet oa ive ,
Alies d'an dud e lavare ,
Ober guir binigen abret ,
Peautramant e oant collet.

Da un Doctör e lavaras ,
Va den, grit prest pinigen vras ,
Ebars un heur e zoc'h maro ,
Pedit Doue , hastit affo.

Er fin pa oa coz meurbet ,
 E teuas dezan ur c'hlenvet ,
 Eo avertisset gant un Æl,
 A fantas e oa poent mervel.

Dirac ar Sent ha Santefet ,
 Etre daouarn Salver ar bed ,
 E teuas da renta e Ene
 Ha da bignat ganta en Ee.

Pemp cant bloas so pe var andro
 Aba eo Sant Guillerme maro.

Gant ar Pap (*) oue canonifet ,
 E renq ar Sent e oue laquet.

E Malevel (†) ur Guer a Franç ,
 Ema e Gorf en assurance ,
 Ema e Bez hac e Ilis ,
 Hac eno er beder bemdeis.

Ar plaç ma eo bet enterret

(*) Ar Pap Celestin II. en deus-en canoni-
 fet , en amfer ma oa Roue e Franç LOUIS
 VII. a hano.

(†) Ar Guer-se a so e Bourgogne.

Gant ur bopl bras so frequentet,
 Abalamour d'ar burzudou
 A ra eno bemdeis c'houlou.

An dud dall o deus ar guelet,
 Hac an dud bouzar ar c'hlevet,
 An dud impotant ar c'herfset,
 Hac an dud clan o deus yec'het.

Bref den tout n'en da d'e dy
 Na deu ar Sant d'e gonsoli,
 Ha da bidi Salver ar bed
 Da accordi dezan e requet.

Guir Patron ar Benitantet,
 Truez ouzomp-ni quemeret,
 En han Doue evidomp pedit
 Ma vezimp salvet dre ho merit,

A M E N.

*Aut poenitendum in hoc seculo,
 Aut poenitendum in futuro.*

PI



4. Olliv. 2. f